



DA ZOUDARDET CÔZ NAPOLEON,

*Pere a zanto o c'halonou o tridal gant ur joa dener,
o c'houzout e zear da guerc'hat Relegou an Harros da
enezen Santez-Helena, tri mil leo a Franç, e pelec'h e
zeo bet chomet captif c'pad c'hoec'h vloas, qent mervel,
hac a zeu anfin da veza digasset da enterri da Baris,
e pelec'h e vezò savet dezàn ur bez caër meubet.*

Var ton : Canomp adare , va broïs , victoriou Napoleon.

DIREDIT, Bretonet vaillant; diredit gant hast amâ,
Da zelaou comz eus ur c'hélou ho peurgargo deus a joa:
E zear da guerc'hat Relegou ar güir sqüer eus ar vaillanc,
Evit douet d'o enterri e Paris , capital Franç.

Louis-Philip, hon Roue mad, leun demeus a vadelez,
Soignos bras da gresqi hepret ar gloar er Rouantelez ,
A ordren d'ar Prinç a Joinvil, e vab, Prinç leuu a galon,
Monet da Santez-Helena da guerc'hat Napoleon.

Qerqent vel ma zeus gouennet dionz ar Sauzon en renta,
 O deveus consantet diouc'h-tu, gant ar joa deusar vrassa;
 Qementse zo ur merq patant demeus ar güir union
 A rën, a drugare Doue, etre an diou nation.

Ar gouarnamant en deveus en e furnez decidet
 Ma vezò ebars en Ilis Hôtel an Invalidet
 Enterret corf Napoleon etouez e harroset cōs,
 A vev c'hoas eue, o téport monet d'an eê da repos.

En Hôtel an Invalidet eus eur joa eston meurbet,
 O sònjal o d'o an enor da zont souden da velet
 Deposi corf an harros bras etouezo, brezellerien,
 O doa goechal d'o Impalaer grêt eus o c'hourach preuven.

An duc cōs Conegliano a zantas ur joa quer bras,
 M'en em sonje bars er moment yaouanqêt a drêgont vloas.
 Oh ! lemezo oll, breinâ eo certen contant hor c'halon,
 Pa deu da repos en hor c'hreiz hon harros Napoleon.

Tri den demeus a renq huel gant ar Princ a ya bremù
 D'ambarqi var ur fregaden evit Santez-Helena :
 Ar general Bertrand, Las-Cas, députet a Finister,
 Neuze ar general Petit, mignon cōs d'an Impalaer.

Na eljet qet ober güell choas : Bertrand evel güir vignon
 A heuillias a volontez vad en exil Napoleon ;
 Tad Las-Cas en d'oe an enor da veza eno ive,
 Petit a recevas adie Napoleon d'e armie.

Mes, mont a rayo ouspen se gante var ar fregaden
 Mignonet cōs Napoleon, diana un tri c'hant den.
 Rouanes Franç, leun a respect evit ar Religion,
 A gass eur bêleg da zivoal relegou Napoleon.

Rentet e Santez-Helena, e vo grêt er vatimant,
 Gant ur soign demeus ar vrassa querqent ur chapel ardant,
 E pehini vo deposit relegate Napoleon,
 Tost da bini vo o pedi miustr ar Religion.

Au Impalaer Napoleon en devoa ur c'hoant esqis
 Ma elje e gorf paour un deiz repos er guær a Baris.
 Cetu-ta, goude nontec vloas m'en deus e ene rentet,
 E teuer da accomplissa ar pez en d'oa reqet.

Hac én zo bet biscoas er bed un harros quer burzodus
 Adalec e stereden vad betec e fin maleurus?

Hanvomp amâ, en e enor, an oll poentchou principal
 Demeus e vuez burzodus hac en oll dreist-ordinal).

Ganet er bemzec a vis eost, mil seiz-cant nao tri-uguent,
 Ne voa c'hoas nemet ur buguel, ma voe er servich qeiqent.
 Er bloa trizec ha tri-uguent voa dija chef escadron,
 Pêvar bloas varnuguent en d'oa pa assiege Toulon.

Ar bloavez goude voe hanvet commandant artilleri
 D'an oad a bemp bloas varnuguent deus an arme Itali;
 Tri bloas goude general-chef demeus ar memes arme,
 Hac e trivac'h ha tri-uguent en Egypt en em gave.

Hanvet qenta consula Franc d'an oad eus a drêgont vloas,
 Ar bloa goude e Marengo e c'honit ur vataill vras.
 E mil eiz cant pêvar hanvet Impalaer ar Francisien
 D'an oad a bemp bloas ha trêgont, dre c'hraç e werlaouen.

E Waterloo, e mil eiz cant pemzec, an drivac'h even,
 Endoa c'hoec'h vloas ha daou-uguent pavlancâ e stereden:
 Forcet dre ar circonstançou, en em rentas d'ar Zauzon
 E guis adversour generus, franc ha leal ha güirion.

Mes ractal gante voe casset tri vil leo demeus ar Franc,
 D'un enezen horrubl meurbet, el lec'h m'oe hep esperanc;
 Enezen Santez-Helena, e pini voe prisonnier
 Epad c'hoec'h vloas, qen a deuas Doue d'achui e vizer.

Nontec vloas ta zo eo maro en enezen horrubl-se,
 Pell deus ar Franc, abandonet en un draounien drist ene;
 Mes, hep dale vo demp rentet, en desir vras pepini,
 Hac e chomio da virviouen en hor c'hreiz da reposi.

Erën e oll gaptivite en devoe evit jolier
An iffam Sauz, Sir Hudson-Low, execrabl d'ar bed antier:
Eblijadur voa da emâ e dourmant i bep istant
Dre bep seurt act a dirantis, dre m'oа eno oll buissant.

Aunfin, qement en deveus grêt oc'h argarz Napoleon,
M'en deveus ellet dont a henn da gontanti e galon :
An Impalaer oll brêvet dre ar hoez eus e hoanniu,
Zo qer fêzet na ell mui stourm ouzqement adourmanchou.

Ebars en andret horruhl-se en deus rentet e ene,
Goude qement eus a drubuill, etre daouarn e Zoue.
Erbemp mis mae, bloa mil eis cant uuan varnuguent eno
E receeo e sacramanchou, hep nep aoun ouz ar maro.

Endro dezàn, leun a zaelou, voa Bertrand ha Montholon,
Daou general o d'oa heuillet en exil Napoleon ;
An autrou abat Vignali, var an douar daoulinet,
A bede Doue a galon vit an harros decedet.

Qerqent e zeus bet e vousqet eus e habit coronal,
Eus e gordon a legion, hac e gleze general
Pini a zougue e Wagram, e Drest, Moscou, Montmirail,
En Austerlitz ha lec'hiou all, vel trec'hour en peb bataill.

Ur grucifi a voe poset neuze var greiz e beultrin,
Vit ma vije tost d'e galon imach e Grouer divin.
Oll ganoniou an enezen na heanent da denna
Evit anonci voa maro brassa harros ar bed-mâ.

Tri arched a voe grêt neuze da receeo e relegou :
Unan plom, unan houarn-guenn, hac un all en acajou.
En hini plom e voe laqet gant e oll accoutrament,
Hac e galon voe dastumet ebars en ur voest arc'hant.

An oll Sauzon, ar Francisien a voa bars en enezen
A heulie an enterrament, hac an oll estranjourien ;
An eiz a vae enterret en un draounnien a garrie
Da visita en e yêc'het vel plac a dranqillite.

Repos e peoc'h, ô harros bras ! en ascre eus a Zone :
 Obtenet ec'h eus da vennat demeus abers hon roue.
 Goulen a rejout reposi var riblou rivier Paris,
 E creiz pobl Franç evit receo oll sicouriou an Ilis.

En amzer horrubl hac impi eus ar revolution,
 E voa serret an ilisou , ne voa nep Religion :
 Napoleon a êruas, a c'halvas ar vêleyen ,
 Hac a laqas da rën e Franç güir lezen ar gristenien.

Ne altemp biqen niveri an nombr eus e victoriou ;
 An Europ oll a voe test mad vee mestr var an oll vroyou .
 Laqat eure brô gaer ar Franç er c'henta var lein ar gloar ,
 Dre e vaillantis burzudus , e furnes hac e bouvoar.

Quinentse a dle hon douguen da gaout dioutan memor ;
 Eu voa brassa harros ar bed , commandi rê d'ar victor .
 Enor ha gloar ra vo rentet e peb lec'h d'e relegou ,
 Ha ra vevo da virviqen e memor en oll vroyou !

C'houi pere oc'h eus bet guechal ar boneur hac an enor
 Da veza gant Napoleon cunduet oll d'ar victor ,
 Requetit oll digant Doue , demeus a fonç ho calon
 Da receo en e varados an trec'hour Napoleon .

Na hanvimp uemet ur Breiziard etouez qenlies hini
 O deus grêt preuen a gourach dirac faç au ennemi :
 La Tour-d'Auvergn , a Guëraliès , da bini e vo souden
 E memor eus e gourach vrás savet prest ur goulonen .

Soudardet Breiz ? mar bez un de ret dihouina ho cleze ,
 Bet memor e Napoleon ho sello demeus an eê .
 Ar sonch-se hepqen ho talc'ho bepret en bent an enor :
 Bet digu atao diouz ho tud côs pa guerzent oll d'ar victor



ENTERRAMANT AN IMPALAER NAPOLEON,

AR 15 EUS A VIS QERZU 1840.

Var ton : *Songit, den abuset, songit en eternite !*

PETRA a glêvàn-me?... Perac an tennou canon?...
Hac erru eo e Franç Relegou Napoleon?

— Ia , an eiz a vis Dû, e Cberbourg erruet,
Hac en eul lestr a vapeur prest int bet transhordet.

Adalec qær Cherbourg , hac a bep tu deus ar Sêu
Eo bordet ar riblou a zoudarded ancien ;
Ur bobl niverus meurbet a bep tu n'em gavas
Vit saludi'r Relegou a Napoleon bras.

Ar bemzec a Guerzu , Paris oll a voa er za ,
Vit ellout contempli an arvest eus ar brassa.
An oll a zired en foul, gant glac'har, da velet
Relegou Napoleon , brassa harros voe bet.

Qerqent ha goulou-deiz e clêvet dre ar ruyou
Oc'h ober ar rappel , tambourinou , trompillou ;
Un heur goude n'em gavas ar gard national ,
Troupiou var droad ha var varc'h eno e general.

Da zeg heur e zoat oll rassamblet var ar blacen ,
Hac e tisambarcjot an Impalaer souden :
Placet voe qerqent gant pomp eno neuze ractal
Gant calz a solemnite er char imperial.

An Autrou Arc'hescop , coulz hac e oll vêleyen ,
Gant devotion vrás o deveus grêt ar beden ;
Qerqent corf an harros bras a zo neuze dougnet
Gant ar zoudarded vaillant hac ar vantoloded.

An autoriteou , eur c'haoun bras en o c'halon ,
 A heuille gant respes Relegou Napoleon ,
 An Deputeet , ar Pared , an oll Generalet ,
 Ar Prefet hac ar Mériou gant enor ha respes .

Oll regimantchou Franç o devoa bet deputet
 Certen nombr eus o zud vit m'o dije asistet ;
 An Aumonier a voa êt da Santez-Helena
 A voa e penn ar c'hortech en eur stat an trista .

An Autrou'r Prinç Joinvil voa gant e etat-major ,
 Marechalet a Franç voa er plaçou a enor .
 Ar char voa oll alaouret ha goal gaer decoret
 Ous drapoyou gounezet var au enemiet .

C'hoezec marc'h dû a voa demeus ar char caer staguet ,
 A dapissou alaouret e voant caparaçonet ;
 Aufin , biscoas na veljot e nep brô gant eston
 Qer caer vel enterramant hor bras Napoleon .

An aigl imperial , an drapoyou tricolor ,
 A zisquele d'an oll e commandjont d'ar victor .
 Aufin , da un heur-anter e zeo bet erruet
 Ar c'horf dirac an Hotel eus an Invalidet .

An Arc'hescop en deus bet commancet an ofic ,
 Hac ar c'horf zo diouc'h-tu antreet bars en ilis ;
 En violet voa guisqet eno ar vêleyen ,
 Evel e Rom da ofic demeus ar vezzerien

Ellout rîr assuri penos james nep christen
 Ouz an asistantet n'ancounac'hint birviqen
 Trêjou caér Napoleon ebars en e archet ,
 En e zillac a vrezel , vel pa vije cousqet .

Ar Prinç eus a Joinvil eu deus presantet neuze
 Corf an Impalaër gant respes bras d'ar Roue ,
 En eur laveret dezân , a galon contristet ,
 Ar c'homzou-mâ gant glac'har hac en daëlon heuzet :
 « Sir , presanti rân dêc'h amâ corf Napoleon.... »
 Ar Roue a respont , an encres en e galon ,

Gant ur vouez majestus ha calz a assuranc :
 « En receo a ràn ouzoc'h en hanou eus ar Franc. »

Ar marechal côs Soult a zalc'he un oriller
 Var bini voa poset cleze an Impalaer ;
 Ar general Bertrand voe carguel gant ar Roue
 Da laqat var an arched an immortel cleze.

Ret voa beza eno evit güelet an daëlou
 A scuill soudardet côs, o sonjal er victoriou
 A c'hounesjont, cunduet gant Napoleon-Vras ,
 Pini neo mui diraze met relcou , sivoas !

Un devez all aroc e voe güelet gant eston
 Daoulinet , o pedi ous arched Napoleon
 Ar marechal Soult, stoüet, mantret gant ar glac'har
 E benn etre e zaouarn , easi stoc d'an douar.

Ur music ar c'haëra , dre donniou oll truezus
 A gaëre an osic , ha moeziou melodius
 A gane gant majeste eno ar C'hyrie :
 Ar galonou a fraille oll d'an Dies iræ.

An ilis oll endro a voa superb decoret
 A dapissiri zei gant o franchou alaouret ,
 Hac e creiz an Templ divin e velet ar vascaon
 Goarnisset oll a vercou truezus an anaon .

Disgennet eo er bez Napoleon da viqen ,
 Evel m'en d'oa c'boantêt , e capital Franc christen :
 Etouez an Invalidet e gort paour a repos ,
 E ene , gant græc Doue , a zo er Barados .

Bremâ , ni , Francisien , n'on eus nemet pedennou
 D'adressi da Zoue , en eur stoüet hor pennou ,
 Evit hon Impalaër gant an dud a ilis :
 Lavarom p a greiz calon , *Pater, De profundis.*

FIN.

E Montroulez , eus a Imprimeri LÉDAN.